



# PAPER

EVIT

MONT E BREURIEZ ABOSTOLACH AR BEDEN  
HA BREURIEZ CALON JESUS



**Me** **a zo bet laket**  
**e Breuriez Apostolach ar Beden ha**  
**Breuriez calon Jesus, ar** **a viz**  
**18**

I. — Breuriez ann Abostolach dre ar Beden a zo evit doughen ann oll galonou christen d'en em lakat a-unan gant calon Jesus, na baouez ket da bedi ha d'en em rei evit ann eneou... Na petra so da ober evit kement-se? Netra ken, goude skriva ann hano war ar Vreuriez ha kaout eur *Billet*, nemet offr ha kinnig, da nebeuta eur veach bemdez, da galon Jesus, hor pedennou, hon labouriou ha poanlou, evit mad ann eneou hag ezomou ann Iliz.

(*Diou Indulj. plenier a zo pep miz, eur gwenner bennag hag eunn deiz all.*)

II. — Eunn doare gwelloc'h a ve en em glevet, pemzek ha pemzek, evit' lavaret etre-z-ho eur Rosæra bemdez. Mes ar re-ze, laket ivez gant-ho ho hano ha bet ho *Billet*, a die lavaret ouz-penn, war-lerc'h ho dizenez, ar pedennik-mâ : « *Jésus-Christ, ma Aotrou, difennit ha diwallit gant ho calon divin hon Tad Santel ar Pap.* »  
(*Indulj. plenier pep trede sul ar miz.*)

III. — Ann nep so e Breuriez Abostolach ar Beden a zo dre ghemment-se euz Breuriez calon Jesus. N'en deuz ken da ober, evit gounid ann Induljançou, nemet trei war ann tu-ze *Pater, Ave* ha *Credo* he bedennou, deuz ar mintin pe deuz ann noz, ha lavaret ar bedennik-mâ : *Calon douç euz ma Jesus, grit m'ho carinn mui-ouzmui.*

(*Indulj. plenier d'ar gwenner pe d'ar sul kenta euz ar miz, hag eun deiz all.*)

Evit ann offranç da ober bemdez, e ve a-walc'h lavaret : *Jesus!* pe : *Ma Jesus misericord!* pe :

Lakat a rann ma fedennou,  
Ma labouriou, hag oll boanion,  
E calon Jesus, dre Vari  
Ma vezo salvet pep hini.

IMPRIMATUR.

Corisopit., die 30 Maii 1869.

**EVARD**

vicaire gén.